

Ganthi eo bet ganet  
Ar Werc'hez Mamm Doue;  
Ha, dre-ze, eo zavet  
D'eur renk huel en Ne.

He galloud a zo braz,  
He madelez ive ;  
Na zisprijas biskoaz  
Peden he bugale.

Zoudarded, moraerien,  
Arog mont euz ar ger,  
Diganthi a c'houlen  
Ø diwall en danjer.

Ar vamm gristen he fed  
Evit he bugale,  
Ma vñint fidel bepred  
Da heuilh lezen Doue.

Dalc'hmad ar Vretoned  
En ð foaniou brassa  
A zavas ð spered  
Warzu Lantez Anna.

Hirið zo ezom braz  
Da c'houlen he skoazel,  
Rag a bep tu, fiouaz !  
Na gweler met brezel.

~~N'hon faroud~~, ni ho ped,  
Laket pep c'h, union ;  
Kresket enhi bepred  
Ar gwir devosion.

Itron Lantez Anna,  
Hon miret de ha noz,  
Ha dalc'het d'hon hencha  
Warzu ar baradoz.

h/  
h/  
v/  
s/  
o/  
s/  
e/v/  
o/  
s/  
v/  
v/

### Kantik Zant Alor.

War don : *Enor ha gloar.* (N<sup>o</sup> 23.)

DISKAN :

*O Zant Alor, eskop zantel,  
Ni a esper, gant ho skoazel,  
Chom da Zoue bepred fidel.*

Zant Alor, er bemped kantved,  
Den zantel braz ha den brudet,  
Da eskop Kemper oue choazet.

Eno, beteg fin e vue,  
Nemet eun dra na glask bemde :  
Kreski enor ha gloar Doue.

Da zovetât an ineou,  
Dalc'hmad e poagn dre e gomzou,  
E bedennou, hag e skoueriu.

Euz lein an Ne, ra deui brema  
D'hon zikour d'ober memez tra,  
Evit brassa mad an nessa.

Meur a gantved zo tremenet  
Aboue m'her gweler henoret  
Er chapelik aman zavet.

En e chapel, nag a c'harrassou  
A neuz laket e bedennou  
Da zisken war an ineou !

Otrou Zant Alor beniget,  
Euz pep sort drouk, euz pep klenved  
Miret hon zud hag hon loned.

Dreist holl, evidomp goulennet  
Ar c'harrass da vean hep pec'hed,  
Pa vimp gant ar maro skoët.

## Kantik Zant Erwan.

War don : *Gwerz koz Zant Erwan.*

DISKAN :

*Otrou Zant Erwan beniget,  
En peb amzer hon zikouret ;  
Bezet, mar plij, hon Avokad  
Dirag Hon Zalver hag e Dad.*

Erwan, en drizekved kantved,  
Tost da Landreger oa ganet.  
E gerent, tud a renk huel,  
A oa war eun dro tud santel.

Ar vamm dreist holl 'lakas he foan  
Da zevel he mabik bihan ;  
En he c'halon oa braz ar c'hoant  
Da welet Ervanik eur zant.

O Zant Erwan, dre ho peden,  
Zikouret ar gerent kristen  
Da zevel mad o bugale,  
D'o zevel en doujanz Doue.

Er ger, epad e yaouankiz,  
Ha diweatoc'h en Pariz,  
D'an holl dud yaouank euz e oad  
Erwan a roas skoueriou mad.

Ra vo dre holl, en Breiz Izel,  
An dud yaouank outan henvel,  
O tec'het bepred aketuz  
Euz an holl bec'hejou mezuz.

Eur vech beleget, muioc'h c'hoaz  
'Vit mad e nessa e poanias,  
Hag a bep tu e labourou  
A zougas freuz 'vit an nenvou.

Holl en dro dimp, herve hon stad,  
Poaniomp ive da ober vad ;  
Gonit ineou da Zoue  
Zo gonit eur plass kaer en Ne.

En kenver an dud ezomek  
Ar Zant bepred oa karantek ;  
En o c'henver e oa ken mad  
Ma hanvent anean o zad.

Eveltan e rank peb kristen,  
Herve ma c'hell, roi aluzen ;  
An aluzen 'ra da Zoue  
Skuilh e venoz war an ine.

En Breiz ha beteg en pell bro,  
Ar Zant eo brudet e hano  
Dre ar burzudou a neuz graet  
'Vit an dud klanv hag aflijet.

Zant Erwan, dre ho pedennou,  
Deut d'hon zikour en hon foaniou ;  
Goulennet 'vit ho pugale  
Yec'hed ar c'horf hag an ine.

O Zant Erwan, pedet, pedet  
'Vit Breiz Izel, hon bro garet ;  
Pedet ma chomo, da viken,  
Eur vro a fe, eur vro gristen.

Evidomp-ni pedet ive,  
Dreist holl pa c'himp dirag Doue ;  
Plijet ganac'h, o patron ker,  
Bean neuze hon difenner.